

HOLL SENT VREIZH, sul kentañ goude gouel an Hollsent

Trogan

Bleuñv ha frouezh da Here santel, a Grist, douar Breizh a brof dit an holl sent o deus hi gwelevet. Dre o fedenn, dre an Hini a'z engenhtas ha dre erbed he mamm Anna, dalc'h-hi feal da'z anv da viken ha dalc'h e'z ppeoc'h enni ar feizidi a'z kan.

Berrgan

Feteiz emañ en hon ser o lidañ kor ar sent a lugernas war Breizh : askezeien ha gwerc'hez, mesaerien hag eskibien, tud kevion hag ebestel. Gant an aeled hag holl sent Iliz Krist, santez Anna ha hon Itron Varia Mamm-Doue hollwerc'hez, a-gevret ez haelganont ouzh erbediñ dizehan evidomp an Doue a-holl viskoazh.